

# CHANSON

## Potret Plouillau

Var ton : *Adieu, Pontreoo*

M'am bije speret da gomprenn, evel a meus fantazi,  
Me a vije n'em impliet da zonet da composi  
Eur c'himiad leun a c'hlac'h, gret dar gonscrivet yaouanq  
O deus tennet ar billet ebars er blaves prezant.

Ebars er bla mil niz cant c'hoec'h, ar bemp a vis guengolo,  
E zeo digneet adare eus a harres Plouillau  
Tud yaouanq evit an arme, tud deus an terrupla;  
Glac'haret eo oll ligne, p'o guelont o partia.

Da bartia gant an actif ne zeus quet nemet pevar;  
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Meledar,  
Ha Yannic Prat, eus ar Goazou, ha Pipi an Aveant:  
Pevar den eus ar re vrava, corfou koer ha tud vaillant.

Ervoannie Jacob a lare en daiz-se d'he gamarad :  
Emâ a zo eun devez trist hac a ra din calonad !  
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad kès desolet !  
Va c'halonic ebars em c'hereis zo dija casi rannet.

Kals a sonchfa dê, marteze, peanos e vent eur poultron  
Em be aoun rac aon ten fosuil pe rae eur voulet canon  
Pe otramant aoun rac ar fatig o vale dre an hentchou,  
Pe gousquet var eu guele gant ebars er c'hordgardou.

Douguen va dillet var va chouq, va fusuil ha va zabren,  
Bale bemde a guer da guer dre ar fanq hak ar voullen  
Ha goude e fin va beach', rencont marteze campi,  
Pe gousket var an douar ien, pe otramant bivoaki.

Tor o deus an nep a sonch-se; ma c'haljet lenn em c'halon,  
Evit gwelet va bolonte ha va inclination,  
Ma ne fotje nemet va goad, me en scuiffe tout joaüs  
Evit souten eun Impalaëer eun tad ker carantezus !

Piou na gombatfe ket gant eun Impalaëer chrizien ;  
Eur gaus ker just ag e bini, zo facil d'a souten,  
Pa zomp memprou da Jezus-Christ, soudardet an Aviel,  
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, ken quittaad euz om c'homtre,  
Demp ni da ilis Plouillau ar supplia bon Doue  
D'hor preservi demeus goal chans pa vêzimp en armeou  
Ha da gonsoli, bars ar guer, hon tadou bag hon mamou.

Adieu dec'h, Autro Sant Millau, patron euz ar barouz-ma,  
Adieu kerent ha mignonet, cessit breman d'a vouela.  
Pedit Doue hag ar Verc'hez, da gavet soign ac'hanomp,  
Hac hon Åel mad d'on c'hondua partout elec'h ma zefomp.

Adieu, va mab, va esperans, eme an tad desolet;  
Piou a gonsolo va zud paour, goude ma vi partiet ?  
Pa vin accablet gant cozni, me vo elevet o laret :  
Ma vije ma mab kez er guer, en dije va soulajet.

Clevit ar vam o quiniadi ive digant he bnguel :  
Deuz ama c'boas, ma bokin eur vech kent evit meravel.  
Aben ma retourni d'ar guer, me vo ed euz ar bed-ma,  
Deus aman etre va dioubrec'h evit ar voech diveza.

A guichen at moment fatal ma c'hens tennet ar billet,  
Beb noz vel ma fot din kousket, me a seblant da velet  
O tont deus eur gombat sanglant var eur chariot blesset,  
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonnet.

Ar zoudard yaouanc konristet c'hoas ken evit partia,  
Evit essai o c'honsoli a lavar, en eur vouela :  
Tavid va zad ha va mam baour, ha bevut en esperans,  
Doue, tad a visericord, a zo bras e brovidans.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,  
Gras Doue hag ar Verc'hez, e vez fin do clahar,  
Evit merk eus hon vaillantis, gant lore deuz bon tocou  
Ni a zistroyo prest d'ar guer evit sec'hi o taëlon.

Adieu da baros Plouillau, ha de holl habitantet,  
Adieu d'hon oli anaoudegez, ha kerent a mignonet,  
Ha ma na memp ket ar bonheur er bet-man da em velet  
Gras deomp ebars er barados assambles da em gavet.